


imbourch



IMBOURC'H, KE LAOUENN BOLITIKEL

C'hwec'hvet bloavezh

Niverenn 61

31 Genver 1975

Imbourc'h o kenderc'hel.....p.3
Roll ar pennadoù embannet e-barzh IMBOURC'H abaoe
1970 betek miz Kerzu 1973.....p.7
Roll anvioù-pluenn ar skrivagnerion.....p.15
Roll ar pennadoù embannet war IMBOURC'H e 1974.....p.19

=====
Koumanant-bloaz : 35 lur. K.R.P. Y. Ollivier 1 534 25
Roazhon. Deraouiñ a ra ar c'houmanant-bloaz e miz Genver.

Priz an niverenn-mañ : 2 lur.

Ar pennadoù a zo da gas da : Y. Ollivier, 7 bd. A.-Burloud,
35 000 - Roazhon. CPPP : 50 015

- 5 -

IMBOURC'H O KENDERCHEL

An niverenn gentañ eus ar bloavezh-mañ a vezo un niverenn vruderezh a vo skignet stank a-walc'h evit reiñ an dastumadenn-mañ da anaout d'an danvez lennerion. Ur seurt niverenn a oa bet embannet endev e dibenn ar bloaz 1973. Kavet e vo en niverenn-mañ eta adarre ur roll eus ar pennadoù embannet er gelaouenn abaoe 1970 ; ouzh ar roll-se e vo staget taolenn ar pennadoù moulet warlene e-barzh IMBOURC'H.

Adal an niverenn 62 e vo kemmet ment ar gelaouenn a vezo moulet diwar neuze er vent 21x16,5. Kavet hon eus gwell darbenn ar vent etre-se a denn da hini an darn-vuiañ eus ar c'helaouennoù studi hag a vo aesoc'h da glenkañ en ur levraoueg. Klask a raimp ivez gwellaat an doare anezhi. Spi hon eus e c'hellimp moulañ ar gelaouenn war "eiltres" ("Off-set") adal niverenn miz Meurzh ha da gaeraat evel-se an diskouezadur anezhi.

Emañ en hor soñj studiañ kudennoù arbennik d'hor bro e niverennoù kentañ IMBOURC'H 1975, ha prientiñ, peurgent, ur rummad pennadoù diwar-benn stad ha kudennoù an Iliz e Breizh. C'hoariet he deus an Iliz ur roll

a-bouez e Breizh hag ar sevenadur nemetañ a zo bleuniet
el ledenez-mañ a zo bet unan kristen. Dleet eo deomp
eta arsellout enkadenn un aozadur en deus stummet
speredegezh hor pobl er c'hantvedoù a-hed hec'h istor.

Marteze a-walc'h ivez e klaskimp ledanaat un
tamm tachenn hor c'helaouenn hag embann bep an amzer
skridoù lennegel o klotañ gant saviad hor bro hizv ha
mennadoù hon obererezh.

Evit lakaat IMBOURC'H da greskiñ hon eus ezhomm
eus skoazell hon holl lennerion ; skoazell a arc'hant
da gentañ rak mizoù pounner hor bo evit gwellaat doare
ar gelaouenn ha nevezid hon araezioù-moulañ ; skoazell,
ivez, gant pennadoù, studiadennoù ha lizhiri a rofe tu
da ledanaat dremmweliad ar gelaouenn ha da binvidikaat
he danvez.

Ned eo IMBOURC'H nag ur gelaouenn diduellañ nag ur
gelaouenn lennegel rik o pleustriñ "an arz evit an arz",
ur gelaouenn a studi hag a stourm, ne lavaromp ket.
Dre ar yezh end-eeun he deus dibabet Breizh da dachenn
stourm ; e-mesk pobl ar Vrezhoned e fell dezhi oberiañ.
N'hon eus na digarez na reizhabeg ebet da reiñ evit an
dibab-se, nemet en em santomp Breizhiz e-touez Breizhiz.

A-walc'h a fiziañs hon eus en hor pobl evit krediñ he deus ur gefridi da seveniñ er bed hag ur gemennadurezh da zegas dezhañ, evel pobl ha kumuniezh politikel ingal o gwirioù da re ar pobloù hag ar c'humuniezhoù politikel all. Er ster-se hag er ster-se hepken e c'hellomp lavarout ez omp broadelourion.

Darn o deus evezhiet n'he doa IMBOURC'H kelennadurezh na linenn bolitikel ebet. Kement-se anzavomp ha diskleriañ a raimp ur wech ouzhpenn perak. N'eo stag ar gelaouenn-mañ ouzh stroll ebet a vije mennet da gemer ar galloud e Breizh ; bez ez eus anezhi hepken ur benveg enklask diwar-benn kudennoù pobl ar Vreizhoned. Kavout a ra dezhi n'eus ket ket ur wirionez politikel hollvedel dizave hogen ez eus meur a hini o tereout ouzh pep pobl hervez hec'h istor hag he stuz hag e tle ivez, n'eus forzh penaos, ar re a ra anezho kristenion degemer hepken da wirionez politikel an hini a glot gant pennaennoù o c'hredenn, ne vern an dibaboù a reont a-hend-all diwar-benn urzhiadur ar gevredigezh. Ne gred ket ar re a zo e penn IMBOURC'H ez eo dieub ar re a ra kristenion anezho, anez bezañ pilpouzion ha touellerion, da zegemer kelennadurezhioù ha prederouriezhoù a zo e dislavar gant ar feiz kristen na kenlabourat en hevelep aozadurioù gant ar re a zo enebourion ar feiz-se, ne vern pezh a arguont a-hend-all. Ne gred ket kennebeut

e c'hell ar gristenion e Breizh, en ur vroad diemframm
ha diempret evel hon hini, koll o amzer o c'hoari ar
yezhelourion.

O terc'hel kont eus ar savboentou-mañ e c'hello an
danvez lennerion merzout gwelloc'h mennadoù oberiañ
er gelaouenn.

=====

ROLL AR PENNADOU EMBANNET WAR IMBOURG'H ADAL GENVER 1970
BETEK KERZU 1973

Bloavez kentañ

Niverenn 1 Kerzu 1969

- H.K. Petra eo an Emsav? pajennoù 5-6
Dizantv Keal ar framm broadel pp 7-10
Y. O. Kelennadurezh ha politikerezh pp 11-14
Jakez ar BIHAN Brezel kravezel e Norzh Iwerzhon pp 15-16
Yann MORVAN Enkadenn Iwerzhon gwelet gant marksourion (gant un destenn
eus an " Irish Communist Organization) pp 17-20

Niverenn 2 Genver 1970

- H.K. Emsav ha Stad pp 27-32
Yann KERLANN (marv e miz kerzu 1969). Stad ar brezhoneg bremañ p 33-37
Y.O. Kudennoù a istor kempred an Emsav pp 38-43
Yann MORVAN Buhez ur brogarour dreistordinal : HO CHI-MINH pp 44-50

Niverenn 3 C'hwevrer 1970

- H.K. Kefridi ar pevare Emsav pp 55-62
Bernez GESTIN Emzivizoù gant ar c'helaouenner iwerzhonat P. Berresford
ELLIS pp 63-73
Jos-Per ar BRAS (1889-1915) skridoù politikel pp 74-76

Niverenn 4 Meurzh 1970

- H.K. Emdouellioù ar bloavezhioù c'hwegont pp 81-105

Niverenn 5 Ebrel 1970

- H.K. Stad, kevredigezh ha sevenadur (I) pp 109-117
Yann MORVAN Diskar Ac'hmed BEN SALAH pp 118-122
Ac'hmed MESTIHI Sokialouriezh ha Frankiz en Trede Bed pp 122- 125
Jos Dirlemm ar BRAS Ar Merour (skridoù politikel) pp 125-128
Youenn OLIER Respont d'ur pennad embannet gant ESB pp 129-130

Niverenn 6 Mae 1970

- ILTUD Don Kic'hote hag ar milinoù-avel pp 135-137
H.K. Stad, kevredigezh ha sevenadur (II) pp 138-145
Jakez ar BIHAN Ur vroad sokialour bihan, Albania
Yezh ha sevenadur pp 145-151
Jos Dirlemm ar BRAS Skridoù politikel pp 152-155

Niverenn 7 Mezheven 1970

- Dizanv Raksell war dazont E.B.V. hag ar framm er mizvezhioù a zeu
pp 159-161
H.K. Stad, kevredigezh ha sevenadur (III) pp 162-173
Jakez ar BIHAN un nebeut titouroù diwar-benn armerzh Breizh pp 173-182

Niverenn 8 Gouere 1970

- H.K. Kembre ha Breizh pp 185-187
Erwan TREANTON Ar vroadelourion o vont war-raok e Kembre pp 188-194
Keleir ar broioù keltiek pp 195-199
Alan KERRANN Addisplegoù diwar-benn talvoudegezh an dilennadegoù di-
wezhañ er broioù keltiek tramor pp 199-203
Galv ar C'hevre Keltiek PP 204-206

Niverenn 9 Eost 1970

- H.K. Stad, kevredigezh ha sevenadur (IV) pp 209-214
Devezhioù-Studi Emsav ar Bobl Vrezhon e Kestemberzh pp 215-224
Jakez ar BIHAN Armerzh Albania (2) pp 225-230

Niverenn 10 Gwengolo 1970

- Jakez ar BIHAN Evezhiadennoù diwar-benn armerzh Breizh pp 235-243
Frañsez FAVEREAU Damsell war istor ha damkeniezh an emsav euskarat
pp 244-252

Niverenn 11 Du 1970

- Youenn OLIER Darvoudoù an deiz : douaridigezh ar vroad pp 263-265
Youenn OLIER Kebeg ha Breizh pp 266-274
Bodadeg vras ar C'hevre Keltiek pp 275-278
Danvez ur statud evit Breizh pp 279-288
Jakez ar BIHAN Emañ hon dazont e goueled ar mor pp 289-294
Skoazell Bobl Vreizh da Bobl Euskadi pp 295-299

Niverenn 12 Kerzu 1970

- H.K. Labour an emsaverien pp 303-307
Breudoù-meur Adc'hanedigezh Breizh pp 308-311
S.L. Heuliadoù ur prosez (Burgos) pp 314-323

=====

. Eil Bloavezh.

Niverenn 13 Genver 1971

- Dizanv Kefridi ha tonkad "Skol an Emsav" pp 3-28

Niverenn 14 C'hwevrer 1971

Youenn OLIER ha Frañsez FAVEREAU (breutadeg) Kefridi ha tonkad Skol
an Emsav pp 31-35
Frañsez FAVEREAU Ar gleizelourien ha ni pp 36-42
Alan KERRANN Pinvidigezh kondon Breizh pp 43-47
Jakez ar BIHAN Da belec'h ez a ar "Mezzogiorno" ? pp 48-51

Niverenn 15 Meurzh 1971

H.K. Peseurt politikerezh a c'hell kaout E.B.V. hiziv ? pp 57-64
Jakez ar Bihan Armerzh Yougoslavia : emdroadur un armerzh sokialour
reolet gant an nevid pp 65-81

Niverenn 16 Ebrel 1971

Youenn Olier Tonkad Imbourc'h pp 85-87
Yvon Gag ha Youenn OLIER Breutadeg diwar-benn Skol an Emsav (Kendalc'h)
pp 88-102
Yeun GOURVEZ kevredoniezh un dispac'h : pempvet bloavezh an dispac'h
aljeriat pp 103-109

Niverenn 17 Mae 1971

Youenn OLIER Distro ar sarpant-mor pp 113-128
Jakez ar BIHAN Ar Reverzhi C'hlas pp 129-133
Yann MORVAN War-du ar bloavezh 2000 pp 134-136
Keleier eus Bro-Euskadi p 136
Yeun GOURVEZ E ser afer nevez ar skritur pp 137-139

Niverenn 18 mezheven 1971

Dizant Metou hag Emsav : daoust hag an Emsav a zle bezañ ur metoù pe
ur framm ? pp 143-147
Yann MORVAN Petra a c'hoarvez e Norz Iwerzhon ? pp 148-152
Jakez ar BIHAN Kenvarc'had ha Broioù keltiek pp 152-153
Jil EWAN Akediñ ouzh ar yezh pp 154-156

Niverenn 19 Gouere 1971

Youenn OLIER Rakwel war dazont E.B.V. pe amsteriegezh an ober emsavel
pp 167-172
Dizant ar Stourm evit ar vro pp 173-181
Jakez ar BIHAN Ur sell ouzh an Trede Bed : Bro indez pp 182-188

Niverenn 20 Eost 1971

- Devezhioù-studi S.A.E. e Rosporden Eost 1971 pp 191-195
Frañsez FAVEREAU Roll ha lec'h an devezhioù-studi pp 197-202
KERVORC'H E ser an embannerezh brezhon pp 202-203
Henri DELIGNY Daeadenn an Arvorig ("Le défi armoricain" diwar-benn ar
gelaouenn c'hall "Le Monde")
Youenn OLIER Talvoudegezh pleustrek an devezhioù-studi pp 210-211
H.K. An Emsav hag al luskadoù kenelelour-kleizour pp 212-215

Niverenn 21 Gwengolo 1971

- Emyr LLEWELYN Adsav (diwar ar c'hembraeg gant F.F.) pp 221-223
Youenn OLIER Steuñv labour an Emsav evit ar bloaz da zont pp 224-226
H.K. Dislavaroù an Emsav (1) Dislavar an istor pp 227-229
Y. KERVORC'H Enez ar C'huzh-Heol : Island pp 229-231
Per BOURDELLES Mao war ar maez p 232
Emsav ar yaouankiz ha kouerien an "Ouest" pp 233-246

Niverenn 22-23 Du 1971

- Ivon GAG Devezhioù-studi Skol an Emsav e Bulad;Gwengolo 1971
pp 251-254
H.K. Ar vaourion hag an Emsav e Breizh pp 255-258
Jakez ar BIHAN War-du ar bloavezh 2000 pp 259-260
Y. KERVOC'H A-dreuz lenn pp 261
Alan HEUSAFF Bodadeg-vloaz ar C'hovre Keltiek pp 262-264
H.K. Dislavaroù an Emsav (2) Dislavar ar yezh hag ar sevenadur
pp 265-271
Pol KALVEZ An Emsav hag ar yezh pp 272-287

Niverenn 24 Kerzu 1971

- H.K. Dislavaroù an Emsav (3) Dislavar an dispac'h pp 291-294
Youenn Olier Rakkemenn pp 295-296
Alan DURAND Diouzh ar c'hiz pp 297-299
Alan DURAND Emsav ha stadelouriezh pp 300-301
Alan DURAND Bangla Desh pe fiñvoniezh un dispac'h pp 302-303
Alan H EUSAFF N.I.C.R.A. (Northern Ireland Civil Rights Association)
pp 304-308
Jakez DEROUET Galv evit skoazellañ Norziwerzhoniz en dienez pp 309-310
Jakez ar BIHAN Bevet Bangla Desh ! pp 314-319
Jil Ewan An Teodur pp 320-322

=====

Frøde Bloavezh

Niverenn 25 Genver 1972

- Youenn OLIER Emsav ha ledemsav pp 3-7
H.K. Dislavarouñ an Emsav (4) : dislavar ar stourm broadel hag ar
stourm renkadel pp 8-17
Yann MORVAN Enkadenn ar yaouankiz kornogel pp 18-25
Jakez ar BIHAN Ur vroad wasket en Afrika : Azania pp 26-29
Keleier liesseurt pp 31-32

Niverenn 26 C'hwevrer 1972

- Youenn OLIER Stourm politikel ha stourm sevenadurel pp35-40
Renta-kont Dael gentañ skol an Emsav pp 41-45
Danevelloù obererezh kreizennoù SAE
Roazhon pp 46-49
Gwengamp pp 50-51
Brest pp 51-52
Bro-Bagan pp 53-54
Devezhioù-studi e Plistin p. 55
Ivon GAG Kendael devezhioù-studi Plistin pp 56-58
Tangi LOUARN Skol an Emsav : kevrenn an eil derez pp 59-60
Dizantv Skol an Emsav hag E.B.V. p 60
Danevell obererezh kreizenn Veignon pp62-63

Niverenn 27 Meurzh 1972

- Peseurt ster reiñ d'ar gleizelouriezh, d'an araogelouriezh ha
d'ar sokialouriezh en Emsav ? pp 67-70
Devezhioù-studi Skol an Emsav pp71
Diskleriadenn izili E.B.V. er vodadeg aozet e Brest a-gevret gant S.K.B
hag ar J.E.B. e miz c'hwevrer 1972 evit harpañ Iwerzhoniz pp 73
Embannadurioù Skol an Emsav ha Kevrenn an Eil Derez p74
Ur sell war an istor : ar sponterezh iwerzhonat e Bro-Saoz
e 1939 pp 83-85
Yann MORVAN Piv eo Renerien an I.R.A. pp 85-87

Niverenn 28 Ebrel 1972

- Dizantv Dibab ur politikerezh pp 91-94
Jil EWAN Petra eo an amvevadouriezh ? pp 95-98
Jakez ar BIAHN Eritrea, un draen e pav al leon etiopiat kozh pp98-101
Jakez ar BIHAN Ur brezel ankounac'haet e Tchad pp 102-105
Skol-hañv etrekeltiek p106
Kamp-studi breuriezh Sant-Erwan pp106-107
KERVORC'H Penaos emañ kont gant hor yezh ? pp 107-109

Niverenn 29 Mae 1972

- Tangi LOUARN Darvoudoù e Breizh : Stourm politikel ha stourm sevenadurel pp 113-118
Lizher kaset gant unan eus an emsaverien lakaet en toull-bac'h e Paris er "Santé" p 119
Danevellskrid eus devezhioù-studi ar J.E.B. pp 120-124
KERVORC'H Gwirvoud Afrika pp 125-127
MAO Tse-Toung Buhezskrid : Geneliezh ur c'humunour (saozneg gant Edgar Snow ha brezhoneg gant Yann MORVAN) pp 128-124

Niverenn 30 Mezheven 1972

- H.K. Toullgoferion ar c'houmoul pe gleñved bugeliezh an Emsav pp141-146
Youenn OLIER Danevellskrid diwar-benn amkanioù hag urzhiadur kevrenn an cil derez e Skol an Emsav pp 147-154
Al labour evit ar vro (dizan) pp 155-156
MAO TSE-TONG Buhezskrid : Geneliezh ur c'humunour (tr) pp 157-160

Niverenn 31-32 Eost 1972

- Dizanv Galvedigezh Imbourc'h pp 165-166
Ronan ANSKER Daoust hag an Emsav a c'hell heuliañ ul linenn bolitikel? pp 167-171
Dizanv Darvoudoù e Breizh, darvoudoù dre ar bed pp 171-172
Youenn OLIER Devezhioù-studi Skol an Emsav e Lezneven p 173
Youenn OLIER Yezh hag Emsav pp 174-182
H.K. Keal an arallekadur hag ar ster anezhañ e rez an Emsav pp 183-190

Niverenn 33 Gwengolo 1972

- Youenn OLIER Dazont ar yezh pp 193-202
Alan HEUSAFF Bodadeg-vloaz ar C'hevre Keltiek pp 203-206
Bernez an NAIL Sokialouriezh ha frankizouriezh : degouezh Chile pp207-224

Niverenn 34 Here 1972

- Dizanv E-ser ur prosez pp 227-233
Bernez an NAIL O tont en-dro eus an Trede Bed pp 232-233
Bernez an NAIL Danvez-labour pp 234-242
Keleier liesseurt pp 243-246
MAO TSE-TONG Buhezskrid : Geneliezh ur c'homunour (tr.) pp 247-256
(Devezhioù e Changsa)

Niverenn 35-36 Du-Kerzu 1972

- H.K. Daoust ha lec'h a zo d'ur politikerezh dispac'hel e Breizh hiziv? pp 261-278
Yann TALBOT Raktres oberiañ Kuzul ar Brezhoneg pp 279-280
- =====

Pevare bloavezh
=====

Niverenn 37 Genver 1973

- Dizantv Raklun oberiañ pp 5-7
L.C. Ar gleizelouriezh hag an Emsav p8
H.K. Emdroadur an trede Emsav abaoe ar brezel-bed diwezhañ pp 9-27
Keleier liesseurt pp 29-32
MAO TSE-TONG Buhezskrid : Geneliezh ur c'homunour (kentic'hoari an
Dispac'h) pp 33-39 (gant ur gartenn)
Yann MORVAN a-zivout koust an dilennadegoù pp 41-45
Erwan TREANTON Brezhoneg kimiiek pp 46-48
Dielloù : Ar voterezh e Breizh pp 49-52
Keleier diwezhañ (broioù keltiek) pp 53-55
Lizher ur sonaozour p 56

Niverenn 38 c'hwevrer 1973

- Youenn OLIER Daoust ha komz a c'heller eus ur sevenadur brezhon ?
pp 59-66
Keleier liesseurt pp 67-74
Jakez ar BIHAN Ar saverezh-listri e Breizh pp 75-78
MAO TSE-TONG Buhezskrid : Geneliezh ur c'homunour (tr.)
(Ar prantad broadelour) pp 79-81
Roll an danvez-kannaded "Breizhat da zilennadegoù ar 4 a viz meurzh
1973 (gant ur gartenn) pp 83-85
Rene LEVESQUE Klacustre Bro-Gebeg (tr.) (gant ur gartenn) pp 87-103

Niverenn 39 Meurzh-Ebrel 1973

Raklavar gant Youenn OLIER

GERIADUR : A R M E R Z H HA K E V R E D I G E Z H (118 p)

Niverenn 40 Mae 1973

- H.K. Darvoudoù an nevez-amzer ha folkloradur an Emsav pp 107-114
Dilennadegoù ar 4 a viz mzurzh 1973 : disoc'hoù an danvez-kannaded
rannvroelour pp 115-116
Yann MORVAN Dilennadegoù ar gannaded e Breizh
(2) Ar Bempvet Republik (abaoe 1958) pp 117-123
Un nebeut titouroù diwar-benn armerzh Breizh (stadegoù) pp 125-129
Jakez ar BIHAN Un nebeut evezhiadennoù diwar-benn ar boblañscuriezh
vrezhon pp 130-132
Keleier liesseurt pp 132-139
Ivon GAG m'em eus c'hoant un toull : Yod-kerc'h pp 141-143

Niverenn 41 Mezheven 1973

Youenn OLIER Diempredur ar gevredigezh kornogat arnevez hag an Emsav
pp 143-151

Dizantv Dre ar vro p 153

ROC'H Evezhiadennoù diwar-benn ar pennad "Folkoreadur an Emsav",
Imbourc'h Mae 1973 p 154

Per PENNEG Dispac'hoù ha dispac'honiezh pp 155-163

MAO Tsé-Toung Buhezskrid : Geneliezh ur c'homunour pp 165-167

Yann MORVAN Dilennadegoù ar gannaded e Breizh.

(1) Ar Bedervet Republik (1945-1958) pp 167-173

N iverenn 42 Gouere 1973

Youenn OLIER Daoust ha peurbadout a c'hell ar gevredigezh lieselour
er bed kornogat ? pp 177-183

Keleier liesseurt pp 185-196

MAO Tse-Tong Buhezskrid : Geneliezh ur c'homunour
(an Emsav Soviedel) pp 197-202

Un nebeut titoutoù diwar-benn armerzh Breizh : Stadegoù (kardalc'h)
pp 203-207

Erwan TREANTON Trevadennoù Portugal pp 209-210

Kartennoù : KERNOW, ALBA pp 211-212

Niverenn 43-44 Eost 1973

Bernez an NAIL P O B L A ñ S O U R I E Z H (42 bajenn)

Niverenn 45 Gwengolo 1973

Youenn OLIER Breutadeg e-ser ar gevredigezh lieselour pp 261-267

ROC'H Politikerezh Strollad Bro-Okitania (P.N.O.) pp 269-271

MAO Tse-Tong Buhezskrid : Geneliezh ur c'homunour
(Kreskidigezh an Arme Ruz) pp 273-280

Yann TROADEG Saunders LEWIS pp 281-282

Jakez ar BIHAN Ar Bankerezh e Breizh pp 282-283

Diviz gant Loeiz ANDOUARD diwar-benn "ar c'hoariva brezhonck" (gant
Bernez an NAIL) pp 285-290

Brezhoneg bev (lizher-kemenn) p 294

Niverenn 46 Here 1973

PER PENNEG Penaos displegañ an impalaerouriezh ? Termenadurioù ha
damkaniezhoù pp 297-311

Erwan GWALEREG Lizher p 312

H.K. Heklev an darvoudoù pp 313-324

ROC'H Evit adsevel pobl Vreizh : ha ret eo tremen dre ar politikerezh
pe ar sevenadur ? pp 324-325

Jakez ar BIHAN Berzh ar sonerezh keltiek ha stourm an Emsav pp 327-334

Erwan TREANTON An tircoul hag ar riezoù arabat : GADDAFI hag ar "vroad"
arabat (gant kartennoù) pp 334-343

Niverenn 47 15 Kerzu 1973

ALI D'AR GOUMANANTERION p. 346

Fañch Keraen. Diwar-benn ar frammadouriezh pp 347-362

Roc'h . Burutelladur "TI PRI" pp 363-366

Erwan Henaff. Adc'hanedigezh porzioù Breizh. pp 367-370

H.Kervevan. Notennoù diwar-benn an impalaouriezh pp 371-378

Jakez ar Bihan. An Emsav hag ar sponterezh. pp 379-386

Niverenn 48 . 31 Kerzu 1973

Roll ar pennadoù embannet ebarzh ar gelaouenn IMBOURC'H abaoe an deroù
(Kerzu 1969-Kerzu 1973) pp 389-396

Anvioù-pluenn ar pennadoù embannet ebarzh IMBOURC'H pp 397-398

Rakwel war emled IMBOURC'H e 1974, war he roll en Emsav diwar vremañ
pp 399-400

=====

ROLL ANVIOU - PLUENN AR SKRIVAGNERION

O DEUS KENLABOURET DA IMBOURC'H

Ronan ANSKER

Yeun GOURVEZ

Jakez ar BIHAN

ILTUD

Herve KERVEVAN

Bernez JESTIN

Lukian KERGOAT

S.L.

Alan KERRAN

Yann MORVAN

Y. KERVORC'H

Bernez an NAIL

Pol KALVEZ

Youenn OLIER

Jakez DEROUET

Per PENNEG

Alan DURAND

ROC'H

Jil EWAN

Yann TALBOD

Frañsez FAVEREAU

Erwan TREANTON

Ivon GAG

Loeiz ANDOUARD (e ser un emweladenn)

Fañch KERAEN

=====

Pennadoù embannet diwar skrivagnerion aet da ene : Yann KERLANN,
Jos-Per AR BRAS.

ROLL AN DUD EZ EUS BET EMBANNET
PENNADOU ANEZHO TROET E BREZHONEG
PE PENNADOU DIWAR OFENN

H enri DELIGNY	Rene LEVESQUE
Emyr LLEWELYN	MAO TSE TONG
Ac'hmed MESTIRI	William WOLFE
Berresford ELLIS	Gwynfor EVANS

=====

PEVAR BLOAZ DIJA...

Niverenn gentañ e miz Kerzu 1969 ; niverenn 48 e miz Kerzu 1973...

EN HOLL 1.268 pajennad embannet e brezhoneg :

1969-1970	324 pajennad
1971	322 pajennad
1972	322 pajennad
1973	500 pajennad

Ar vent a zo chomet heñvel (21 x 27) met ar golo a zo bet nevezet meur a wech.

Golo an niverennoù 1-lo a oa bet treset gant Line BOURDIER

Golo an niverennoù 11-23 a oa bet treset gant Line BOURDIER

Golo an niverennoù 24-41 a oa bet aozet gant Alan DURAND

Golo diwezhezañ IMBOURC'H adal an niverenn 42 a zo bet aozet gant Jakez DERQUET.

=====

Un toullad oberennoù klok azo bet embannet gant IMBOURC'H evel niverennoù ordinal pe evel stagadennoù :

GERIADUR ARMERZH HA KEVREDIGEZH

POBLANSOURIEZH gant Bernez an NAIL

ISTOR AN EMSAV gant Youenn OLIER, teir levrenn ;
TRE LA LANV gant Youenn OLIER, dastumad barzhonegoù.

=====

B A K W E L W A R E M L E D
I M B O U R C ' H E L : 7 4 H A G
H E R O L L E N E M S A V
D I W A R V R E M A N

Goude bezañ bet ur gelaouenn gefridiel eus E.B.V., pe kentoc'h, damgefridiel, he deus IMBOURC'H roet bod da skridoù izili S.A.E. ha da gemennaennoù pe embannoù kefridiel an aozadur-se a-raok dont da vezañ ur gelaouenn dieub a-grenn goude ma oa bet divodet E.B.V. da heul Dael S.A.E. e miz gouere 1972.

Evel ma c'hello merzout unan o follennata niverennoù ar gelaouen abaoe pevar bloaz, stank a-walc'h eo bet niver ar genlabourerion da IMBOURC'H. Dibaot avat ar re o deus skrivet en un doare ingal enni, ha setu moarvat gwander kasusañ ar gelaouen koulz hag hini an holl gelaouennoù brezhonek - en tu-hont da niver gwall zister al lennerion ; e pep kelaouenn vrezhonek n'eus nemet daou pe dri o sevel an darn-vuiañ eus ar pennadoù. Moarvat ez eo kalonekaus soñjal ez eus yaouankizoù eus kenlabourerion IMBOURC'H met anat eo n'eo ket bastus tamm ebet ur seurt saviad.

Padal o devo merzet al lennerion moarvat ez eo aet hor c'helaouenn war wellaat abaoe bloaz e keñverioù zo ; tevoc'h eo deuet an niverennoù da vezañ un tamm mat, liesseurtoc'h ha ledanoc'h ivez an danvez anezho peogwir ez eus bet kavet enno, n'eo ket hepken pennadoù diwar-benn politikerezh hag armerzh - a zo testennoù ordinal ar gelaouenn - hogen diwar-benn prederouriezh dre vras ivez. Stankoc'h eo ivez niver ar genlabourerion.

Merket hon eus ivez he deus ar gelaouenn kroget da embann labourioù pouezus evel ar " GERIADUR ARMERZH HA KEVREDIGEZH" pe ISTOR AN EMSAV. Kendalc'het e vo gant an ervenn-mañ hag a-raok an hañv moarvat hor bo moulet ar roll eus kumunioù Breizh e Brezhoneg, ISTOR AN ARMERZH hag ARMERZHOURIEZH

eil kevrenn ISTAR HOL LENNEGEZH (SKOL WALARN). Ac'hann da fin ar bloaz e klaskimp moulañ ivez ISTAR an EMSAV (eil emsav).

Klask a raimp ivez ober eus IMBOURC'H, maz eus tu, adarre kelaouenn labour ur stroll bennak. Ne gav ket deomp e talv kalz ar boan embann kelaouennoù ha n'int ket stag en ur stumm bennak ouzh un aoadur. War var emañ ar gelaouenn a zo distag diouzh pep stroll da dreiñ d'un doare magazin pe gelaouenn lennegel kenedelour mat evit dilettanti pe "estetourion". Ur gelaouenn a rank bepred bezañ ur benveg stourm anez treiñ d'un "hobby" bennak ; egin un obererezh kevredigezhel pe bolitikel e tle bezañ. Rak-se hon eus lavaret ne oa ket IMBOURC'H tamm ebet ur gelaouenn neptu pe un "Tribune Libre" - sañset - e-lec'h ne c'hoarvez n'eus forzh penaos nemet divizoù etre tud vouzar !

D'al lennerion d'hon harpañ da seveniñ hor mennad, o koumanantiñ, o klask koumananterion, o skrivañ d'ar gelaouenn hag o kas pennadoù dezhi. Neuze hepken e c'hell IMBOURC'H ur roll politikel gwirion.

Evit echuiñ e kinnigomp adarre hor gwellañ hetoù evit 1974 d'hol lennerion.

A-DREUZ LENN

F. BROUDIC.- Roll al leoriou hag ar pennadoù bet embannet e brezoneg e 1973. Bibliographie des publications en Langue Bretonne. Année 1973. STUDI N°1. Kerzu/décembre 1974. Roazon/Rennes. Imprimé et distribué par le C.R.D.P. (Centre régional de Recherche et de Documentation pédagogique).- 21 ktm. 114p.

Deurus eo al levr-mañ e meur a geñver hogen dreist-holl dre ma tiskouez e kemer ar brezhoneg un tammig lec'h er reizhiad kelenn gall kefridiel. Graet eo al labour-mañ gant kalz a aked ha kalz a basianted a zo aet d'e sevel, moarvat. Diskouez a ra ivez ez a implij ar yezh skrivet, da vihanañ, war greskiñ tra ma koazh er c'hontrol hini ar yezh komzet war ar maez. Ur benveg aes e vo d'ar re a bled gant al lizheradur brezhonek.

=====

R O L L A R P E N N A D O U

e m b a n n e t w a r I M B O U R C ' H

e 1 9 7 4

Niverenn 49. 31 Genver 1974

Talvoudegezh politikel ar c'helenn yezh pe donkadur
SKOL AN EMSAV pp.3-46.
Danvez diazezoù pp.47-48

Niverenn 50. 28 c'hwevrer 1974

Mojennoù an Emsav : mojenn ar werin gant Youenn
Olier pp.51-61. Lizher d'an doueoniourion a-gor
gant Jean Fourastié tr.. Erwan Gwegen pp.65-79
(ouzhpenn : raklavar : pp.63)
An drevadenn gembraek e Patagonia, gant Bernez an Nay
pp.81-89.
A-dreuz lenn : Kammdro an Ankoù p.90.

Niverenn 51-52. 30 Ebrel 1974

Tri zalbenn ar stourm evit ar yezh ; an talbenn
kentañ : ar gevredigezh vrezhon pp.93-103
Ur Stad e Breizh, gant Roc'h pp.105-110
Kudenn ar c'henelioù indian en Amerika ar Su, gant
Youenn Troal. pp.112-118
Raklavar d'ar pennad diwar-benn Tibet pp. 119-123.
Chouanted an Himalaya aozet gant Yec'hann-Dominig
Olier pp.124-~~139~~.
Ur sell ouzh istor Kembre gant Jakez an Nay pp.141-145
Keleier ar broioù keltiek pp.147-149
Raklavar da gelc'hlizher "Beleion Breizh" pp.151-152
Lizher da Strollad "Beleion Breizh" pp.153-159.
Gant red an darvoudoù p.160.

Niverenn 53-54. 30 Mezheven 1974

Tri zalbenn ar stourm evit ar yezh : talbenn an tiegezhioù.
pp. 163-173.
Lizhiri pp.175-179.
Hippy, hippy, hippy, hourra ! pp.181-189.
(gant Yec'hann-Dominig Olier)
Rakskrid d'ar pennad da heul gant Y.O. pp.191-194
Diwar-benn titloù hag anvioù gant Y.-Vari Kervorc'h
pp.195-198

Dielloù : mennadoù-diazezh SKOL AN EMSAV evit ar
bloavezh 1974-1975 pp.199-203.
Addisplegoù pp.203-208.

Niverenn 55-56 31 Eost 1974.

Raklavar pp.211-212

Un damsell war istor Kembre pp.213-286

Niverenn 57. 30 Here 1974.

Tri zalbenn ar stourm evit ar yezh. III. Kelennadur
ar yezh er skolioù kefridiel pp.289-296

Keleier eus ar broioù keltiek pp.297-301

Prederadennoù e ser ur prederour : Stirner gant
Yec'hann-Dominig Olier pp.303-312

Iliz ha politikerezh e Breizh pp.313-315

Diskeladegoù an hañv e Breizh pp.315-317

Ar C'hendalc'h etrekeltiek en Naoned pp.317-
321.

Hol lennerion a skriv p.322.

Diskouezadegoù an hañv pp.323-324

Lizhiri : Doareoù "Emglev an Tiegezhioù" pp.324-325

Niverenn 58. 30 Du 1974

Raklavar pp. 329-334.

Diellskrid diwar-benn ar bourevierezh er bed,
kempennet ha skridaozet gant Youenn Treal
pp.335-364.

Gourfennskrid pp.365-366.

Niverenn 59-60. 31 Kerzu 1974

Skritur ha politikerezh pp.371-384.

Raklavar d'ar pennad da heul p.385.

"Kumuniezh an Arc'h" gant Jo peronnet troet e brezhoneg
gant Paol Kalvez pp.387-391.

Ragali gant an embanner p.393.

LAMA MEUR "Kammedoù kentañ war hent ar sonerezh".

Burutelladenn gant Jil Ewan ha Perig Herbert pp.395-414.

=====

S K R I D O U H A G O B E R E N N O U A C ' H E L L E R
P O U R C H A S E T I I M B O U R C ' H

"Bñvorennoù ha deizlevr 1941-1942 gant Youenn OLIER. 35,00 lur

"Deizlevr brezel 1943" gant Youenn OLIER. 32 lur.

Deizlevr brezel Here-Du 1943" 10 lur.

Deizlevr brezel 1944" 30 lur.

Barzhonegoù gant Youenn Olier : 15 lur.

"Kelc'h an amzer" gant Youenn Olier. 12 lur. (barzhonegoù)

"Tre ha Lanv" gant Youenn Olier : 12 lur (barzhonegoù)

ISTOR AN EMSAV e teir levrenn. Pledañ a ra al levrenn gentañ gant ganedigezh an emsav adal deroù an XIXvet kantved. Gouestlet eo al levrennoù 2 ha 3 da emdroadur an emsav etre 1898 ha 1918.

Diviet eo al levrenn gentañ. Maz eus a-walc'h a zanvez lennerion o c'houlenn e vezo adembannet.

26 lur eo priz an div levrenn diwezhañ, 2 & 3.

Emañ kendalc'h istor an emsav war ar stern ; ar prantad etre 1918 ha 1944 a vo danvez al levrennoù da zont.

ISTOR HOL LENNEGEZH

Deuet eo er-maez levrenn gentañ an eil kevrenn a zo gouestlet da rener "SKOL WALARN", Roparz Hemon. Bez ez eus anezhi ur c'haier a zaou-c'hant pajennad bennak. Ar priz anezhi a zo 22,60 lur.

Dont a ray eil levrenn SKOL WALARN er-maez hep dale. Enni e vo kavet ur rummad studiadennoù diwar-benn skrivagnerion all SKOL WALARN. An danvez anezho a oa bet embannet gwechall e-barzh AL LIAMM, ugent vloaz a zo bremañ. Priz al levrenn-mañ a vo ivez 22,60 lur.

Kendalc'het e vo gant "Istor hol lennegezh" e seurt doare ma 'n em astenno eus 1900 betek hiziv an deiz.

DEIZLEVR BREZEL genver-c'hwevrer 1945

Ur c'haier a hanter-kant pajennad bennak a zeuy er-maez a-benn miz pe zaou. Kendalc'h an "Deizlevr 1945" a vezo moulet dre eiltres.

Priz al levrenn-mañ a zo 8 lur.

Danevellañ a ra trubuilhoù an emsaverion goude ar brezel.

HUMANAE VITAE troet e brezhoneg gant Jil Ewan.

ar gelc'helenn-mañ a zo bet moulet e stumm ur c'haier a 40 pajennad bennak. Ar priz a zo 5 lur.

EN DONVOR DA VREIZH. Peseurt Breizh, peseurt Europa? Peseurt bed ?

An levr-mañ a bolitikouriezh a zo bet savet gant Jil Ewan. Bez e vo anezhi ul levrenn a zaou-c'hant pajennad bennak war vent vras 21 x 29,7. Dont a ray er-maez, moarvat, en deroù-kañv-mañ. Ar priz anezhañ n'eo ket bet termenet c'hoazh.

Evit kaout diskleriadurioù, skrivañ d'ar gelaouenn.

Liesskrivet gant ar gelaouenn CPPP 50 015 Ar Rener:Y.Ollivier

AN TIREOUL E MOR AN HANTERNOZ

